

*HC\_0011\_Me n'ouzon ket petra 'm 'eus graet*  
*Jean-Yves Le Roux - Poullaouen – 1995*  
Bal Gavotte

Me n'ouzon ket petra 'm 'eus graet  
D'am dousig koant, p'emañ fachet

*Kred' a ran pa welin 'nezhi*  
*'vin ket miret, 'vin ket miret*  
*Kred' a ran pa welin 'nezhi*  
*'vin ket miret da vouchañ dezhi*

Lâret oa dezhi oan butuner  
ha lonker sistr ha merc'hetaer

An hini 'n eus lâret an dra-se  
n'eus ket lâret ar wirionez

N'eus ket lâret ar wirionez,  
nemet un hanter gaou a vez.

Plij' a ra din ar chopinaoù  
hag ar merc'hed koant a-wechoù

Ha ma evan hag ober a ran  
arc'hant am eus ha paeañ a ran